

Saniñ ha Soniñ Brezhoneg

Kaset gant : Serj Bozeg Loïc de Châteaubriant Youenn Gwlegen

PETRA EO AR PAL ? PENaos HA WAR BETRA E VO LABOURET ?

Diwar glevet ha diwar gomz, dielfennañ hag anavezout ar perzhioù a ya d'ober muzik ar brezhoneg.

Reiñ da bep hini da glevet e vouezh hec'h-unan o klask produiñ peotramant adober ar perzhioù a vo lakaet war wel diwar skouerioù tennet eus poelladennoù pe eus dielloù liesseurt (kontadennoù, rimadelloù...).

Sikour pep hini da glask e hent ha "krediñ mont dezhi" betek reiñ da glevet ur muzik yezh ken tost d'ar brezhoneg ha ma c'hell bezañ.

Pal kentañ ar prantadoù labour a zo reiñ d'an dud da santout an traoù, da glevet ha d'ober o-unan kentoc'h evit studiañ ar reolennoù a ya d'ober ar sistem yezh.

Ur roll eus neuizioù fonetik ar brezhoneg hag a vo gwelet ha pleustret mod pe vod warne a c'hallomp reiñ amañ :

- Ar sistemoù pouezmouezhiañ e brezhoneg ar gwalarn (KLT), ha brezhoneg ar vandenn etre (Kgw), ha brezhoneg ar gevred (Gw) : ar perzhioù boutin hag an diforc'hioù.
- Plas an taolmouezhiañ : gant ar gerioù liessilabennek, gant ar gerioù unsilabennek, ar gerioù na vezont ket taolmouezhiet, ar stropadoù gerioù a zo da vezañ distaget evel ur geriad hepken, ...
- An doare da daoler ha da stummañ ar pezh a ya d'ober ur pouezh-mouez :
- Hirder ar c'hensonennoù hag ar vogalennoù diouzh plas an taolmouezh.
- Livioù ar vogalennoù (hir pe berr, digor pe serr) diouzh an degouezhioù : plas an taolmouezh, levezon ar c'hensonennoù stok, ar perzhioù rannyezhoù ...
- Ar mod da zisklipañ ar c'hensonennoù (hir pe berr, gwan pe kreñv) diouzh an degouezhioù : plas an taolmouezh, liammadurioù ha sandhioù, ar perzhioù rannyezhoù ...
- An nerzh dindan an taolmouezh hag ar ritm lakaet er frazennoù : hirder ar sillabennoù, an ehanoù, al liammennoù, ...
- Ar velodienn hag ar mod da saniñ ar frazennoù : dialaniñ, kas ar vouezh skiltr pe skiltroc'h dindan an taolmouezh ha gant red ar frazennoù. Al labour youl-komz evit stummañ melodienn ar frazennoù.
- Al liammadurioù hag ar sandhioù : sandhi kensonenn/vogalenn, sandhi kensonenn/kensonenn, etre ar gerioù, etre rannoù ar gerioù e-barzh ur ger kenaozet.
- Elfenoù a fonetik kenkoulz hag an tremen a vras eus ar brezhoneg skrivet d'ar brezhoneg komzet : levezon ar reizhskrivadur

Beb ma z'aimp war raok e vo savet asamblez ha tamm ha tamm un daolenn a vras eus efedoù ar sistem taolmouezhiañ war ar mod da zisklipañ ar soniadoù a gaver e brezhoneg hag al liamm a zo da gaout gant sistem ar c'hemmadurioù.

EVEZHIADENN : Bemdez e vo pleustret war an danvez-se eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Eus meur a gornad-bro e teu an tri c'helenner : Bro-Gwened, Bro Leon, ha Kerne Izel.

Mat e vo d'ar stajidi kas bep a sonenrollerez ha selaouelloù a galite da labourat a-stroll pe o unan.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

